



# CONVERSION

## MARI-MADELEN.

*Var ton Guerz ar Gananeen.*

*Martha.*

MADALEN, savit eus ho quele,  
Da vent d'ar bredisication ;  
Jesus a sermon hirie adare,  
Clêvit-én gant attantion :  
Bez en deus eur secret excellant  
Da douoh calon ar bee'herien ,  
Pa vent qer calet ha diamant ,  
O rento tom demeus a yen .

En em habillit gant dilijanc ,  
Gant aon na vezac'h divezat ;  
Tostait ountâ gant confianç ,  
Ha pouezit a gomzou erfat ;  
Esper am eus e vjot touchet  
Qent ma finisso ar sermon ,  
Pe otramanç eo net lavaret  
E zeo caledet ho calon .

*Madalen.*

Va c'hoar Martha , me yel d'e velet  
Ha d'e glêvet en e sermon ,

149. 15. 10. 2-15

2

Evit ma contantin ho speret,  
Ha nonpas gant devotion ;  
Me am bezo ar guriosite  
Da laqât eves pis outan ,  
Evit galoud goude qemense ,  
Rei ur guir rapport anezan.

*Jesus.*

Eur pastor mad a goell un danvad,  
En deveus eur c'heus bras dezi ,  
Hac a abandon ar vandennat  
Evit mont da glasq anezi ;  
Me vel unan so bet dianget ,  
Hac a meus ur joa vrás outi ;  
Me a laqai etouez va dénved ,  
Eus a lêc'h na zianqo mui .

Ene superb , calon revolte  
Evidout e teuan da sermon ;  
Me ameus da velet o tonet ,  
C'hoant ameus da douch da galon ,  
Digor an nor d'ar Speret-Santel ,  
Hac en eun abandon dezan ,  
Na ziseléryi pelloch ar brezel  
D'ar c'hraçou a c'heus digantan.

*Madalen.*

Jesus , va Mestr ha va guir Autrou ,  
Va c'halon oc'h eus gonezet ;  
Me rei uzach vad eus ho craçou  
Pelloch en dia vezin er bed.  
Me ya da guitat va ornamanchoù ,

Va c'halon a santân mantret;  
 Adieu d'au oll gompagnunéziou,  
 Ha da guement ameus caret.

*Martha.*

Pétrâ eo eta , va c'hoar Mari ?  
 Honnes so ur chanchamnt pront !  
 Perac e teut d'en em desoli ?  
 Ha den en deus grêt deoc'h affront ?  
 Foula rit , evel pa vec'h follet ,  
 Oc'h oll ornainanchou caëra ,  
 Ha par vezint ganeoc'h collet ,  
 E ranqot adare prena.

*Madalen.*

Va c'hoar Martha , va list da ober ,  
 Jesus en eas va gonezet ,  
 En deus va leqeat eh coler  
 Ous ar pez so cos d'am pec'het .  
 Me ne brenin james mui biжен  
 Dillat eas a eur pris qér bras ;  
 Me zougo bremâ fris ha lién ,  
 Ha non pas satiu na damas .

Ar c'horf-mâ , p'ini so bet ornez  
 Gant dillajou caér ha traou all ,  
 Ne vezo pelloc'h mui goloet  
 Nemet gant ar c'hos dillat fall .  
 An douçder en deveus bet sanctet  
 O touguen voulous ha satin  
 A vezo evit biжен chenchet  
 Ebars en tolyou disciplin .

*Martha.*

Ha possubl ve, va c'hoar Mâdalen,  
 E pe bet ur sort douézon ?  
 Eur joa vras am bezô da vijen  
 Da peza galvet d'ar sermon.  
 Qê, red buan da vanget Simon,  
 Ha lêz an dud da lavaret ;  
 Gra offr da Jesus eus da galón  
 Dirac ar Pharisianet.

*Madalen.*

Lavaret pepini a garo ,  
 Me ne rân fors eus an dra-zé ;  
 Jesus am c'har ha me èr c'haro ,  
 Mestr eo din ha d'am bolonte.  
 Me voëlc'ho e dreid gant va daëlou ,  
 A zirac Simon hac e dud ,  
 Hac a rei goap eus o sansurou ,  
 Hep mez nac aon rac o goal vrûd.

Va dàoulagad, roet oc'h eus daëlou  
 Da voëlc'hi treid va medecin ;  
 Ha c'houi , va c'halon , huanadou ,  
 Petra benac ma vec'h indign.  
 Va memor , ho pet sonch anezâ  
 E pep heur hac e pep moment ;  
 Va bolonte , tomit diountâ ,  
 Na scuizit qet ous e garet.

*Ar Pharisian.*

Ma ve an den-mâ eur quir brofet ,  
 Eguis ma layar sur e zeo ,

Ne lesfe qet ur plac'h debordet  
 Da sec'hi e dreit gant he bléo,  
 Na ne lesfe qet tostat ounfâ;  
 Na ne rafe nep stat anezi ;  
 Mes donet a rafe d'e e'hanna,  
 Ha d'e chasseal eus an ti.

Ne deus ous e dwejd frotet elegant,  
 Nemet gant dessign d'e laqat  
 D'e c'haret ha da veza contant,  
 D'ober anezi hepret stat :  
 Rac eviti da scuilla daëlou ,  
 Daëlou tromplus eo ar re-se ,  
 A alfe servichout da laçou  
 Da drompla anep a sonchfe.

*Jesus.*

Simon , n'anavez mui ar vreg-mâ,  
 Ne deo mui evel ma zeo bet ;  
 Ur galon pur e deveus bremâ ,  
 Renoncet e deveus d'ar hed ;  
 Desqi a ra d'an oll o never ,  
 Ha memes dide da guenta ,  
 Qemer-hi evel eur milouer ,  
 Deus da ober ar memes tra.

Na sonch' qet dide e ve criminel  
 Ar garantez e dëus ouzin ;  
 Comzet e vezô em aviel  
 Eus a guement vad a ra dîn :  
 He c'hrimou so desi pardonet  
 Abalamour d'e c'harantez ,

Hac abalamour ma zeo fachet  
Da veza grêt fallagriez.

Qê, greg, en peoc'h, en patientet,  
Da feiz en deus da c'hrêt salo ;  
Pardonet eus dit meur a bec'het,  
Bez fidel betec ar maro.  
Publi, en despet d'ar Judevien,  
Penaos ec'h eus cavet moyen  
Da veza dit da grim pardonet  
Gant Doué, ar Mestr souveren.

### *Madalen.*

Ah ! permetit d'ho servicheres  
Da chom bepret en ho presanç,  
Rac aon na ve quer maleuruses  
D'oc'h offansi dre inconstanç ;  
Nac vit ma quezo ar judevien  
N'en deus eos d'ar gontersion,  
Eus ar bec'heres vrás Madalen  
Nemet ho conversation.

### *Martha.*

Autrou, n'hon eus biscoas meritet  
D'ho receo ebars en hon ti,  
Rac-se noun qet penos e priset.  
Dont da renta bizit deomp-ni ;  
Commandacet eo bet ar judevien  
Da barlant ha da vurmuri,  
Abalamour d'am c'hoar Madalen,  
Dre m'oc'h eus istim eviti.

7  
*Jesus.*

Hervez o goal inclinacion  
E teu ar judevien da juji,  
Ha dre ur speret ambition  
E fell dezo va sansuri.  
Ha ne ouzont qet ar medeein  
A les an dud o deus yec'het,  
Evit rei d'ar re a so infirm  
Soulajamant en o c'hlévet.  
Eus a ene Mari-Madalen  
M'emeus chasseet seis clévet ;  
Hep n'oar nicùn eus ar judevien  
Pe fècon emeus-int casset ;  
Ennòn e lacas e c'honfianç,  
Ar pez so cos eus he yec'het ;  
Ma na vez er medecin fizianç,  
E zeo dies bras caout remed.

*Martha.*

Autrou , p'och eus bet ar vadelez  
Ta zonet d'hon ti d'or guelet ,  
E zeo just demp-ni ar joa discnèz  
Hon eus ous o tiguemeret :  
Mes grit d'am c'hoar Mari labourat ,  
Ne ra nemet ho contempli ;  
Livirit desi n'en dê qet mat  
Chom bepret da seneanti.

*Jesus.*

Lès Madalen bepret em presanc ,  
Beza meus outi carantez ;

Me istim he repos, he silanç,  
 Câlz mui éguet ar pez a res :  
 Hi e deveus grêt ar choas guella,  
 Ha den njen lamo diganti :  
 N'eus nemet un affer er bed-mâ  
 Necesser da effectui.

*Madalen.*

Va Doue, va Mestr, va c'harantez,  
 Penos etâ rîn-me bremâ ?  
 Grit ma varvin ganêch assambles,  
 Ha va zennit eus ar bed-mâ.  
 Pa ho quelân er groas o souffri ;  
 N'allân qet miret da ouëta,  
 Ha p'o quelân en hoc'h agoni,  
 E teu va c'halon da ranna.

*Jesus.*

En em gonsol, greg carantezur,  
 Me zalc'ho dit fidelite ;  
 Ne vezo qet collet dit Jesus,  
 Dont a rai da caout adare ;  
 Destumi pis ar goad ameus scuillet  
 Var an douar ebars er groas,  
 Ha deus bepret atô d'am c'haret,  
 Da recompanç a vezò bras.

*Madalen.*

Maro e Jesus, petra rîn-me ?  
 Bourrevien, c'houï a so cruel !  
 Da viana va lazit ive,  
 Douç è dûn gant Jesus mervel :

9

10

11

12

18

14

15

16

Sonjit d'en em gvertisst ;  
 Pa zeo guir nemet dre ar souffranc  
 Ne allomp pretanti repos ,  
 Eo ret dont da ober violanc  
 Evit antren er barados.

*Ar Pec'her.*

Ne qef ret deoc'h beza qer presset  
 Da souffr ur binjen garo ,  
 Re abret oc'h eus y commancet ,  
 List ma vezo tost d'ar maro ;  
 Qemer a illit c'hoas oc'h amzer  
 Ha dont d'en em rejouissa ;  
 En ur monient e e'hellomp ober  
 Hor silvidiguez er bed-mâ.

*Madalen.*

N'ellomp james beza re bresset  
 Da repari hor peo'hejou ;  
 Lies hini so en em dromplet  
 O credi ur seurt rôsoniou .  
 Nep plou benac a ra ej guis-se  
 Hac a zifer betec ar fin ,  
 En em rînt dign a goler Doue ,  
 Hac eus a bep faveur indign.

*Ar Pec'her.*

Ne remerquer mai var he pizach  
 Al liou qer vif ha qer brillant.  
 Na ne yeler en ho taoulagad  
 Nemet ur regard languissant ;  
 Ouspen e zint, cazimant beuzet ,

Mar o list hep o soulaji  
 En ber amzer e viot souezet  
 Pa na servichint deoc'h mui,

*Madalen.*

Va frofit ve, nonpas un domach,  
 Em be' collet va oll guelet,  
 Pa na velfen birviqen james,  
 N'em bezo morse a regret.  
 Nep piou benac a ra goal usach  
 Eus ar mad en deus recevet,  
 En em laqa ebars en' angach  
 Da ober pinijen galet.

*Ar Pec'h er.*

Na tom na yen n'en deveus noazet,  
 Na grêt d'ho qenet neb domach,  
 Ardeur an col n'en deus qet poaset  
 Nac ho taouarn nac ho pizach,  
 Ur parasol hac un evantail,  
 Ur mascl hac ur re vanegou,  
 Ho piye bepret en appareil  
 Evit conservi o liou.

*Madalen.*

Pa zeu din inemon a guemense,  
 N'allan qet miret na ruzian  
 Gent mez e velet ar vanite  
 A galz a dud eus ar bed-mañ;  
 Ar Verc'hes hac he mab, va Zalver,  
 O tec'hel aroc'an tyrant,  
 A anduras rigol an amzer,

Hep caouet nep soulajamiant.

*Ar Pec'her.*

Guechal e teuac'h d'en em admira,  
 Ma velac'h ar sqeut ho pisach ;  
 Ma selfac'h er mezellour bremâ ,  
 N'em en anafac'h davantach :  
 Dre ar rigol eus ar binijen  
 Oc'h eus en lajet da sec'ha ,  
 Eguis an dellion eus ar vezén  
 Pa zeuont o unan da goueza.

*Madaleñ*

Me n'emeus qet affer davantach  
 Da sellet er mezellerou ;  
 N'e qet ar guenet eus va bisach  
 A fell d'am Mestr ha d'am Autrou :  
 Va c'hâlon en deveus goulengnet  
 Ha roet emeus-en dezâ ,  
 Mes n'er c'haffe james preparet  
 Neimet souffr a rafen da guenta.

Evit mellezour m'emeus choaset  
 Va Jesus staguet ous ar groas ,  
 P'ini , siouas ! ameus offâncet  
 Dre bec'hejou hac a so bras ;  
 Dre ma voan guechal bet qer volach  
 Da denna gloar eus va guenet ,  
 Mes Doue am miro davantâch  
 Na guezin en ur seurt pec'het.

*Ar Pec'her.*

Ar blêo caér-se pere a zouguit ,

Ne servichont dêc'h da netra ,  
 Na ne zigassint dêc'h nep profit,  
 Nemet dent a rac'h d'o guerza ,  
 Me vel e zint déjà neglijet ,  
 Noc'h eus anezo nep sourci ,  
 Ha gouscoude o deveus plijet  
 En amzer ma teuac'h d'o soigni.

*Madalen.*

Va bleo ameus ato conservet ,  
 Hac a rin epad va buez ;  
 Mar o deus servichez d'am pec'het  
 D'am pinijen e raint iveauz ;  
 Gant ur parfum sacr int parfumet ,  
 Hac en deus tñ c'huez excelant ,  
 Ne ouffen james o dioüëret  
 Nac evit aour nac evit arc'hant.

*Ar Pec'hér.*

Pelec'h oc'h eus laqet ho perlez ,  
 Biseyer , carcan , rubanou ?  
 Habillet oc'h eguis eur baourez ,  
 Ne desse qet eus a vadou ,  
 Rac ne velan bremâ simplamant  
 Nemet cos dillat var ho tro ,  
 Ha noc'h eus gen evit ornamant  
 Nemet blêo ho peun d'o colo.

*Madalen.*

M'e meus renonceet d'an oll perlez ,  
 D'an bizeyer ha rubanou ,  
 Eyit beza guir servicherez

Da vestr an oll berležennou :  
 Nohpas ma ve pec'het o douguén,  
 Mar grér usach vad anezo ;  
 Mes siouas dîn, Mari-Madalen,  
 Offancet ameus Doue dreizo.

*Ar Pec'hèr.*

Noc'h eus qét ur guele da gousqet,  
 Hac à ve dious ho merit :  
 Ho cost tener so var ar c'halet,  
 M'e meus aon n'en em abrejt.  
 Guechal e couscac'h var ar c'hoton,  
 Ha bremâ edoc'h var ar mèn :  
 Ma na guirit chench eus a fêçon,  
 Edoc'h dija prest da dremen.

*Madalen.*

Me a zo en em digustumet  
 Diouz gueleou coton ha plun,  
 Hac emâ a sonjit so calet,  
 A gavân re douç hâ re cun.  
 Evit plijout d'am maya-caret,  
 Eo ret dîn dont d'e imita ;  
 Cousqet en deveus var ar c'halet,  
 Ha me reï ïvez evelta.

*Ar Pec'hèr.*

Pelêc'h mâ an ainzer dremenet,  
 M'o piye a bep seurt boejou ?  
 Ha bremâ n'o queler servichet  
 Nemet a vara ha louzdu .  
 Ha noc'h eus evit-oc'h oll breuyach

Nemet hepqen dour da eva ;  
 Elec'k m'o pije vit oc'h usach  
 Demeus al liqueuriou guella.

*Madalen.*

Va Zalver en deveus bet yunet  
 Abalamour d'or pec'hejou ,  
 Ha ni en em gav importunet  
 Oc'h imita e exemplou .  
 Ur c'horf so maguet dre licheri  
 Ne zent james eus ar rôson ,  
 Hac e zeo ret dont d'en em dompti  
 Dre ar yun hac an orêson .

*Ar Pec'her.*

En divertissamanchou public ,  
 Er bal , en danç , en opera ,  
 O vont da glêvet cana'r musiq ,  
 E teuac'h d'en em divertissa ;  
 Eus ho pemp squianchou naturel  
 O pije pep sort plijadur ,  
 Hac e zoc'h deut brenâ quer cruel ,  
 N'accordit netra d'an natur .

*Madalen.*

An divertissamanchou public  
 A zeue da noazout d'am ene ,  
 Rac eus a chast e teuont lubric ,  
 Peb den so daonet dre'n hent-se .  
 Comedi , bal , danç hac an theatr  
 A deu da chench speret an den ,  
 Hac a rent memes i've idolatr ,

Siouas ! calz a grouadurien.

*Ar Pec'her.*

N'o clêver qet o cána soniou  
 Evit en em divertissa,  
 Ha ne sorti mui eus ho qenou  
 Nemiet couzou ar santela ;  
 Ouspen , lezet oc'h eus an dançou ,  
 Elec'h m'o poa plijadurez ,  
 Evit gallout rei huanadou  
 En ur plac a dristidiguez.

*Madalen.*

Va zeot mar be deus va servichet  
 Evit menli an aérouant ,  
 Me viro en amzer da zonet  
 Ne vezo sur qen insolant.  
 Ar bal , an danç hac an nosveziou ,  
 Va Doue , c'houi a oar an oll ,  
 Ma na rafen pinijen anezo ,  
 A rafe din monet da goll .

*Ar Pec'her convertisset.*

Goude qenient amens lavaret ,  
 O sonjal ho pervertissa ,  
 Me vel e zon gauêc'h gouezet ,  
 Va c'halon n'ell mui resista ;  
 Contraign on da chench eus a gomzou  
 Ha da garout ar binijen ;  
 Me ziscuezo dre va oberou  
 Penos e zoun chenchet a gren .  
 Ha cavet e ve ur femelen

A guët cre resolution ,  
 Equis ma zeo Mari-Madalen ?  
 C'houi so penitantes guirion.  
 Graçou bras oc'h eus digant Jesus ,  
 Recevet oc'h eus ar voyen  
 Da renta ar'bed , ar e'hiq confus ,  
 Satan hac e servicherien.

Me ameus qemeret calz a boan ,  
 Ha n'emeus netra gonezet ,  
 Da servicha piou , nemet Satan ?  
 Eur vez eo din e lavaret ,  
 Rac me a vea deputet gantam  
 Da zont d'ho tenti , Madalen ,  
 Ha c'houi so bet trec'h din ha dezàn ,  
 Ar pez ne gredjen birviqen.

*Madalen.*

Na servichit james mui biqen  
 Ur mestr hac a so un tyrant ;  
 Sulvui e servichit e lezen ,  
 Sulvui e reï deoc'h a dourmant ;  
 Qemerit Jesus da gabiten ,  
 Hac en em anirolit gantam ,  
 Ha mar don-me Mari-Madalen ,  
 En em gontantit' anezâ .

FIN.

E Montgalez , e ti LIKBAN.